

## Frañs, un tiriad dindan levezon ar c'hêrioù

Derc'hel soñj

Petra eo perzhioù kresk ar c'hêriekaat war tiriad Frañs ?

Petra e teu an takadoù diwar ar maez da vezañ ?

Lederezh-kêr

4 Gall diwar 5 zo o vevañ en un tolead kêr

- 60 % dioute zo o vevañ en ur **pol kêrel** (tolpad-kêrioù pe e vannlev)
- An obererezhioù (labour, prenadennoù, dudi) zo kreizennet er c'hêrioù : ar **meurgêriekaat** eo

Emañ ar c'hêrioù o krignat an takadoù diwar ar maez tost oute : an **trogêriekaat** eo

1 Gall diwar 5 zo o chom en un takad diwar ar maez daoust ma'z eo goloet 60 % eus an tiriad gant ar maezioù koulskoude

- Emañ an takadoù diwar ar maez o cheñch hervez an **implij** a vez graet dioute (dudioù, takadoù labour-douar startijenn gante pe war-ziskar)
- An implijoù a bep seurt-se a zegas **diemglev** etre an oberourien

Monedone reoliek  
(hentoù stouvet, saotradur, amzer mont-ha-dont hiraet)

Takad kêr

Takad trogêrel

Takad diwar ar maez

### Gerioù-alc'hwez

- Tolead kêr
- Fiñvusted
- Takad diwar ar maez
- Trogêriekaat
- Meurgêriekaat (metropolizadur)
- Kêrioù padus
- Monedone reoliek

### Sifroù pennañ

- 80 % eus ar Frañsizien zo o vevañ e kêr.
- Bez' ez eus ouzhpenn 350 tolead kêr e Frañs.
- Bez' ez eus tost da 12 milion a annezidi e tolead kêr Bariz.
- 60 % eus tiriad Frañs zo takadoù diwar ar maez.

### Evit mont pelloc'h

#### DA LENN

- A. Lesterlin, « La nature dans la ville », *Les Clés de l'actualité* n° 757, miz Mae 2008.
- N. Blanc, « Sortir de la ville, un choix ? », *Sciences Ouest* n° 270, miz Du 2009.
- « À quoi ressemblera la ville de 2050 ? », *Okapi* n° 887, miz Meurzh 2010.

#### KLASK PELLOC'H

- <http://www.geoado.com>  
Pennadoù diwar-benn ar preder war ar mod ma vez kemeret e kont an diorren padus er c'hêrioù.



# Ar pep pouezusañ

## Tiriad Frañs

### Brastres sintezenn

### Peseurt perzhioù mat ha perzhioù fall zo gant tiriad Frañs?

#### Ul lec'h pourvezet-kaer e kornôg Europa

- Un tiriad digor war dri zalbenn arvor
- Ul lec'h tremen plaset mat etre norzh ha su Europa
- ... **hogen**
- Ul lec'h e stumm ur penn-ar-bed

#### Tiriadoù dasparzhet war pep kevandir

- Un tiriad er zonenn gerreizh
- Tiriadoù tramor enezek ha trovanel dreist-holl
- Ur ZEE a bouez dasparzhet etre pevar meurvor


#### Un tiriad kempennet...

- Danvezioù talvoudekaet
- Redioù trec'het


#### ... hogen erru gwan

- Meteier tramor ganto redioù ha riskloù kreñv
- Gwanaet da heul ar c'hempennoù

### An tresadoù alc'hwez



An hinadoù



Frañs dre ar bed



An torosennoù

### Ar gerioù-alc'hwez

- Metoù
- Danvez naturel
- Redi
- ZEE

### Sifroù pennañ

- 550 000 km<sup>2</sup> tiriad pennvro
- 60 000 km<sup>2</sup> tiriad tramor
- Un TEM a 200 000 km<sup>2</sup>, 50 % anezho tramor
- Brasañ bro Europa ar c'hornôg dre he gorread
- Harzoù boutin gant 5 bro eus UE

### Evit mont pelloc'h

#### DA LENN

- *Atlas du 21<sup>e</sup> siècle*, J. Charlier et Y. Lacoste, Nathan 2011.

#### KLASK PELLOC'H

- Lec'hienn an INSEE : [www.insee.fr](http://www.insee.fr)
- Al lec'hienn [www.2011-annee-des-outre-mer.gouv.fr](http://www.2011-annee-des-outre-mer.gouv.fr).
- Titouroù a bep seurt war an tiriadoù tramor gall



## Ar Frañsizien en o ziriad

Derc'hel soñj

### Petra eo doareoù pennañ poblañs Frañs ?

#### Dremm-boblañs ur vro diorroet

- Koshadur ar boblañs
- Spi da vevañ uhel-mat


#### Perzhioù dibar Frañs

- Frouezhusted uhel (> 2 vugel dre vaouez)
- Feur genel uhel (er renk kentañ en UE)


#### Digempouezioù e-barzh an tiriad

- Ur Frañs « yaouank » en Hanternoz, er Reter hag e kêrioù tramor
- Ur Frañs « kozh » er C'hreisteiz hag er C'hornôg

### Penaos eo dasparzhet poblañs Frañs war an tiriad ? Peseurt luskoù a c'haller damwelet ?



Lec'hioù « goullo » ha lec'hioù « leun »



Monedone war meur a live

### Gerioù-alc'hwez

- Emgresk naturel
- Treuztiriadurioù diabarzh
- Enbroañ
- Monedone reoliek
- Monedone

### Sifroù pennañ

- Poblañs d'ar 1<sup>añ</sup> a viz Genver 2012 : 65 milion  
– Pennvro Frañs : 63 milion  
– Tramor : 2 vilion
- Stankter etre : 113 annezad/km<sup>2</sup>
- Feur frouezhusted : 2,01 bugel dre vaouez

### Evit mont pelloc'h

#### KLASK PELLOC'H

- Lec'hienn an INSEE : [www.insee.fr](http://www.insee.fr)
- Lec'hienn an INED : [www.ined.fr](http://www.ined.fr)





# Ar pep pouezusañ

## An takadoù produiñ e Frañs

Derc'hel soñj

### Kemmoù ekonomikel bras

- Industriezh war-gil
- Ekonomiezh troet war-zu ar servijoù


### Kemmoù diwar an diorren padus

- Emdroadurioù teknologel
- Cheñchet eo an doareoù da broduiñ

### Takadoù produiñ o cheñch da vat


evit bezañ nevezus ha kevezus

### Dasparzh nevez an takadoù produiñ war an tiriad




- Gounidigezh ed askoridik
- Gwini, legumaj, frouezh, gwez, fleur
- Sevel loened
- Liesgounezerezh

Takadoù labour-douar arbennik



- Pol industriel pennañ
- ▲ Teknopol
- Takadoù tro-dro gant startijenn
- Diagonalenn ha n'eo ket gwall industrializet
- Diazad war zastreñ

Bihanoc'h an diforc'hioù etre ar biz hag ar mervent



- Meurgêr bedel
- Meurgêr rannvroel
- Hentoù pennañ

Un tiriad meurgêrieket, un ekonomiezh a servijoù

### Gerioù-alc'hwez

- Industriezh, teknopol, teknopolenn, industriezh o vont da get, nevezadur
- Labour-douar, diorren padus
- Obererezhioù an trede gennad, touristerezh
- Bedeladur

### Sifroù pennañ

- 4<sup>e</sup> renk europat ha 7<sup>vet</sup> renk bedel en industriezh
- 1<sup>añ</sup> galloud europat evit al labour-douar
- Ar servijoù : 80 % eus ar PIB, 75 % eus ar boblañs oberiant
- 1<sup>añ</sup> bro douristel er bed


### Evit mont pelloc'h

#### DA WELET

- *Le Temps des grâces*, D. Marchais, 2009.
  - *Mondovino*, J. Nossiter, 2004.
- Daou deulfilm evit kompren gwelloc'h al labour-douar hiziv e Frañs.
- *La Mise à mort du travail*, J. R. Viallet, 2009.

#### KLASK PELLOC'H

- Lec'hienn an Observatoire des territoires : [www.territoires.gouv.fr/observatoire-des-territoires/fr](http://www.territoires.gouv.fr/observatoire-des-territoires/fr)





## Aozadur tiriad Frañs

Derc'hel soñj

### Penaos eo aozet Bro-C'hall ?

#### Ur c'hêriekaot kreñv


- Tolpad-kêrioù Pariz hollc'halloudek
- Diorroadur bras kêrioù zo er peurrest eus ar vro (Bourdel, Tolosa, Montpelhièr...)

#### Tiriadoù dizingal o nerzh


- Bro-Bariz, enframmet mat e-barzh lusk nerzhus Europa hag ar bed
- Trowardrioù nerzhus ar C'hreisteiz hag ar C'hornôg
- An Hanternoz hag ar Reter en un enkadenn
- Maezioù zo lakaet diaes

#### Un tiriad digor war Europa hag ar bed


- Etrefasoù war zouar gant megalopolenn Europa (Eurorannvroioù, tunnel dindan Mor Breizh)
- Etrefasoù war vor gant ar porzhioù bras (Marsilha, an Havr-Nevez, Dukark)
- Ur c'hroashent daremprediñ bedel (Pariz)
- Kroashentoù europat (Lyon, Lille)



An dek tolpad-kêrioù pennañ



Un aozadur nevez en tiriad



Un tiriad digor war ar bed

#### Gerioù-alc'hwez

- Maezioù dilezet
- Arvorekaat
- Bedeladur
- Dastroadur (adframmatadur an ekonomiezh)

#### Sifroù pennañ

- Pariz : 29 % eus pinvidigezh ar vro.
- Kêrioù bras rannvro : 28 % eus an implijoù en trede gennad uhel e Frañs.

### Evit mont pelloc'h

#### KLASK PELLOC'H

- Lec'hienn an DATAR : <http://territoires.gouv.fr/la-datar>
- Lec'hienn Ofis an tiriadoù : <http://www.datar.gouv.fr/observatoire-des-territoires/fr>
- Lec'hienn Ofis an dizingalderioù : <http://www.inegalites.fr/>





## Unaniezh Europa, un unaniezh Stadoù

Derc'hel soñj

### E peseurt keñver eo UE un tiriad dibar ?

#### Un tiriad war sevel atav

28 Stad abaoe 2007  
(ouzhpenn 500 milion a dud)

- Ur pol pinvidigezh ha diorroadur meur war skeul ar bed
- Ur savadur politikel
- Ur zonenn frank-eskemm ha kenlabour ekonomikel
- Un tiriad a vez diaes termeniñ e harzoù

#### Un tiriad meur a ziforc'h geografel ennañ

- Un hollad tiriadoù liesseurt dre o geografiezh, o istor hag o sevenadur
- Liveoù kemer perzh er politikerezhioù boutin disheñvel hervez an dibaboù graet gant ar Stadoù zo en UE (spas Schengen, zonenn euro...)

### Penaos e ra UE diouzh an dizingalderioù zo en he ziriadoù ?

#### Un tiriad meur a zizingalder ennañ

- Dizingalderioù demografel, ekonomikel ha sokial
- Un aozadur spas o tiskouez un enebiezh etre ur c'hreiz pinvidik ha diorroet ouzh trowardroioù enframmet pe enframmetoc'h

#### Ur youl digreskiñ an dizingalderioù

- Arc'hantiñ ha reiñ lañs da raktresoù ekonomikel ha sokial a-benn digreskiñ an dizingalderioù sokio-spas
- Mekanikoù kengret a vez kavet abeg enno abalamour d'an enkadenn ekonomikel bed

#### Gerioù-alc'hwez

- Ledanaat
- Stadoù
- Europa
- Frank-eskemm
- Politikerezh kenstagañ
- Unaniezh Europa

#### Sifroù pennañ

- **Gorread** : 43 milion a km<sup>2</sup>
- **Poblañs** : ouzhpenn 500 milion a dud
- **Stankter ar boblañs** : 114 den/km<sup>2</sup>
- **IDH** : 0,9 (uhel-tre)
- **Spi da vevañ** : 78,7 vloaz

### Evit mont pelloc'h

#### DA LENN

- M. Foucher, « Europe, Europes », *La Documentation photographique* n° 8074, Meurzh-Ebrel 2010.

#### DA WELET

- *Paroles de volontaires européens* (2010), <http://www.jeunesseenaction.fr/index.php/espace-projet/videos/paroles-de-volontaires-europeens>. Testenioù tud yaouank o deus graet ar servij europat youlek.

#### KLASK PELLOC'H


- Lec'hienn ofisiel UE : <http://europa.eu/>
- Ar pep retañ war UE : <http://www.touteleurope.eu/>
- Ar programm europat « yaouankiz oc'h ober » : <http://www.jeunesseenaction.fr/>
- Al lec'hienn <http://www.curiosphere.tv/europe/> Teuliadoù war beajoù en Europa, mont en-dro UE.



# Ar pep pouezusañ

## Frañs hag he levezon war ar bed

Derc'hel soñj



**Ul levezon c'heopolitikel greñv**

**Frañs er bed**

**Ur sevenadur hag a zo e pep lec'h er bed**

- Stad demokratel
- Un ezel pad eus Kuzul surentez an ONU
- Prezidanted an OMC hag an FMI zo gall allies
- Ur vro hag a sikour kalz ar broioù war ziorren

- Brud vat ar sevenadur gall (lennegezh, sinema, gastronomiezh, giz...)
- Roll an OIF evit kas ar galleg war-raok

### Gerioù-alc'hwez

- DROM
- COM
- Gallegañ (frankofoniezh)
- OIF
- ZEE

### Sifroù pennañ

- Frañs tramor : 120 000 km<sup>2</sup> a zouar, 2,65 milion a annezidi
- Eil ZEE er bed
- 220 milion a c'hallegerien er bed
- OIF : 75 Stad ha gouarnamant enni

### Evit mont pelloc'h

#### DA LENN

- Atlas mondial de la francophonie, éditions Autrement, 2006.
- « Les outre-mer français », TDC niv. 1017, miz Even 2011.

#### KLASK PELLOC'H

- Lec'hiennoù Internet an DROMoù ha COMoù
- Lec'hienn an OIF : [www.francophonie.org](http://www.francophonie.org)



# Ar pep pouezusañ

## Pegement a c'halloudegezh he deus Unaniezh Europa e gwirionez ha betek pelec'h ez a ar c'halloudegezh-se?

Derc'hel soñj

### Penaos e sked Unaniezh Europa war ar bed ?

#### Dre he galloudegezh ekonomikel

- Kentañ galloudegezh kenwerzh
- Kentañ spas produiñ pinvidigezhioù
- Kentañ galloudegezh industriel
- Eil galloudegezh labour-douar

#### Dra ma sach tud hag arc'hant

- 3 milion a enbroidi bep bloaz
- Kentañ pol touristerezh bed
- Sachañ a ra ar c'hapitalioù hag an embregerezhioù estren

### Betek pelec'h ez a ar c'halloudegezh-se ?

#### N'eo ket gwall c'halloudek war al leurenn etrebroadel

- Diaes eo sevel a-du an eil Stad gant eben a-fet diplomategezh
- N'eus arme european ebet

#### Disparelezhioù zo etre ar Stadoù zo enni

- An holl Stadoù ne c'houlennont ket donaat memes mod
- Dizingalderioù diorroadur gwashaet gant an enkadenn ekonomikel

#### Gerioù-alc'hwez

- Kriterioù galloudegezh
- Pol galloudegezh

#### Sifroù pennañ

- Unaniezh Europa :
  - 500 milion a dud
  - 25 % eus PIB ar bed

#### Evit mont pelloc'h

##### DA LENN

- *Atlas d'une nouvelle Europe*, Autrement, Paris, 2008.

##### KLASK PELLOC'H

- Lec'hienn ofisiel UE : <http://www.europa.eu>  
Titouroù war mont-en-dro UE, ar programmoù-sikour...
- Ar pep pouezusañ war UE : <http://www.touteurope.eu>  
Istor UE, an doare m'eo aozet, ar pezh a ra.